



**KANTIK NEVE**

**SAND ERVOAN**

War don : *Leaz Breiz.*

N'en euz ket enn Breiz, n'en euz ket unan,  
N'en euz ket eur Zand evel Sand Ervoan. ( 2 wech )

N'euz ked enn Argoad na mu enn Arvor,  
Kouls ha Sand Ervoan vid ann dud a vor.

N'euz ket barz ar vro, dre-oll e lerer,  
Hag e ve ken mad vid al labourer.

N'euz ket kaeroc'h skouer d'ann dud a lezen,  
Evid Sand Ervoan, skouer ar veleien.

D'ar bevienno kez ha d'ann dud a boan,  
N'en euz ket gwelloc'h evit Sand Ervoan.

N'euz chapel e-bed enn bro Breiz-Izel,  
Evid-on ker koant ha m'e he chapel.

Mar fell d'hac'h pedi ha pedi er-vad,  
Et d'ar Minihi da glask ho mennad.

Dousan m'e pedi, pe oer trubuillet,  
Elec'h ma pedaz ar Zant binniget !

Dousan m'e gwelet ar maner zantel,  
Elec'h m'e ganet Sant braz Breiz-Izel !

Maner Kervarzin a welaz ive  
Ine Sand Ervoan o ninjal d'ann Ee.  
N'euz Chapel na ti em bio Breiz-Izel,  
Vel ti Sand Ervoan ha vel he chapel.  
N'en euz ket enn Breiz eunn iliz ker kaer-  
Hag he iliz-veur enn kear Landreger.  
Evit Sant Tual, ho Tad binniget,  
Otro Sand Ervoan, c'houi 'n euz hi zavet  
Enon man ho pe ha n'euz ket er vro  
En efe gwelet mu a viraclo.  
Me deui war-n-ehan euz a Gervarzin,  
Hag e ve red d'in dont war ma daoulin.  
Dister eo ho pe, re dister, allaz !  
Adzavet e vo kaeroc'h vit biskoaz.

Hon Eskop neve en euz hen laret :  
Ni a zikouro, vel gwir Bretoned.

Ha pe vo 'nn he zao, vo eur pardon kaer,  
Oll ishibien Breiz barz el Landreger.

Oll ishibien Breiz gand hon Eskop-ni,  
War ve Zand Ervoan, a deui da bedi.

Hon Eskop neve en euz hen laret,  
Ha gant Sand Ervoan e vezo peet.

Ha ni, Bretoned, ni lar a-unan :  
Bennoz d'ann Eskop a gar Sand Ervoan !

Neb a gano ar c'hantik-man gand doujanz Doue, a c'honeo daou-  
ugent devez induljanso.

Landreger, enn driouac'hed a viz Mae, 1883.

† EUGÈNE-ANGE-MARIE,

*Eskop San-Brieg na Landreger.*